

TREDE BLOAVEZ

30



Merc'hed Pont-n'Abad e gouel

K
R
O
A
BREIZ

HERE 1950

EVIT AR BLOAZ SANTEL...

LAKAIT EN HO TI
SKEUDENN

HONTAD SANTEL AR PAB PIE XII

ar brava skeudenn
bet graet betek vremen
ha gant eur skritell
e Brezoneg

150 lur dre ar post

Goulennit

KARTENNOU-POST "7 SANT BREIZ"

Ar seiz Kartenn dre ar post

120 lur pe 8 timbr a 15 lur

E Gwerz : **S¹⁶ BALB** — B. P. 108 Rennes — C. C. P. 1171.35

HA-PRENET ho peus ?

al levr nevez :

"Panorama de la littérature Bretonne de langue bretonne et de langue française des origines à nos jours".

gant **Y. M. RUDEL**
295 lur dre ar post

La Vie et les Œuvres

de Jean-François-Marie-Maurice-Agathe

Le Gonidec

du Docteur **DUJARDIN**
800 lur dre ar post

Yez hon Tadou

al levr nevez, aes ha splann
evit deski hor yez,
savet gant an Ao. Seité
ha Stéphan

395 lur dre ar post

HERE

133646

Niv. 30

KROAZ-BREIZ

Evit kement a zell ouz danvez-skrid ar gelaouenn : skriva da :
rener Kroaz Breiz : **M. l'abbé Jean-François Falc'hun**, professeur
au Grand Séminaire de Quimper (Finistère).

Evit kement a zell ouz koumanantou ha profou, skriva da :
M. l'Abbé Laurent Bleunven, recteur, Plomelin, par Quimper
(Finistère). — **C. C. P. 1266.53 Rennes.**

Koumanant ordinal (eur bloaz) : **350** lur
Koumanant a zikour..... **500** lur
Koumanant a enor..... **800** lur



Dre ziuver a blas, ne gavot ket en niverenn-man
ar pennad diweza diwarbenn Bleun-Brug ar Zent e
Kastell-Paol. Digarez a c'houlennomp digant hol
lennerien.

Taolenn an niverenn-man

Miz du, miz an Anaon (K. R.).....	Pajenn	2
Sant Loeiz-Vari a Vontfort (Y. Tranvouez).....	—	2
Eus an eil Bleun-Brug d'egile : Landevenneg (L. B.) ..	—	3
Tremenvan hon tud koz (B. Charlez).....	—	5
Goueliou bras an YKAM e Paris (Y. J.).....	—	6
Hirvoudou mamm sant Herve (Saig ar Go).....	—	7
Eus a gement seurt douar (Y. Bekod).....	—	8
Daou eostig an impalaer (Paotr Treoure).....	—	9
Tenzor an dintin goz (Ab-Sulio).....	—	13
Kelou.....	—	14
Kanv.....	—	15
Evit ar geginerez.....	—	15
C'hoariou.....	—	16

Miz du : miz an Anaon

Miz du, miz ar gwez dizeil, miz an hada, miz an Anaon.

A-vec'h m'eo echu gant ar gristenien kana-gloar an holl Zent, eost ar baradoz, ma tro an Iliz da bedi evit an Anaon, beuzet e mor tan ar Purgator.

Goude bole drant ar c'hleier, ec'h en em strew war hor maeziou hag hor c'hariou, ar glaz, trist ha melkonius. E kalon pep hini, e tint ivez glaz an holl dud anavezet gwechall hag aet da « di hon Tad ». Ha mouez ar c'hleier a laka da ziredek warzu an Iliz eur bobl a dud... Plou n'en deus ket eun den kar, pe eur mignon, o kousket er vered? E Breiz, dreist-holl, e toujer ar paourkez eneoù e dalc'h justiz Doue. E bro all ebet, ne zoñjer kement enno. Rak Breiziz, en deus lavaret unan bennak, a zant muioc'h eget ar poblou all, pegen dister eo ar follennig a netra a zo oc'h ober speurenn etre buhez ar bed-mañ hag hini an Anaon.

Miz du, miz ar gwez dizeil. Evel ma welomp ar gwez d'ar mare-mañ o koll o dellou dindan hej an avel-c'houez, e welomp ivez, a-hed hor buhez, hon amezeien, hor mignoned, hor c'herent o tistrei d'an douar yen... Ni, evelto, eun deiz, pe dost pe bell, a gouezo d'hon tro, skoet gant an Ankou didruez.

Da c'hortoz, pedomp evit an Anaon. Kinnigomp evito Sakrifiz an Oferenn. Komuniomp evit ma plijo gant Doue diverra o foaniou ker kalet: ker kalet ma n'eo netra poaniou gwasa ar bed en o c'heñver. Aluzenn hor pedenniou ne vo ket kollet. Hor c'harantez a vo digollet, ha kaer! Rak an eneoù, nijet d'ar Baradoz abalamour d'hor pedenniou,

o devezo soñj ac'hanomp, pa vimp-ni o c'houzanv war an douar-mañ, ha dreist-holl e tan ar Purgator. Int-i, d'o zro, a c'houlennno digant Doue kaout truez ouzomp, ha Doue a zelaouo, pedenn e vignoned.

Pa 'z aimp d'ar vered, soñjomp petra 'jomo eus hor c'horf goude ar maro. Klevomp Job o lavaret deomp er Skritur Zakr, a lennomp en ofiz gouel an Anaon: « Poazet eo va c'hig; staget eo va c'hroc'hen ouz va eskern; ne jom nemet kroc'hen en dro d'am dent... Berr eo amzer an den; emañ niver e vizioù etre ho taouarn, o va Doue. Merket ho peus termen e vuhez, ha ne c'hell tremen pelloc'h... N'omp nemet yeod-parkeier: dindan c'houezadenn loskus an Aotrou e tizec'h ar yeod hag e kouez ar bleuñv... Doue avat a bad atao. »

Setu aze kentelioù hag a zesko deomp beva distag diouz kement a dremen.

Miz du, miz an hada!

Breina ra an hadenn kuzet en douar araok sevel d'an ed kaer hag a vezo levenez al labourer da zeiz ar peurzourn.

Hor c'horf-ni ive, goude tremen en douar, a zavo adarre leun a vuhez, evit mont gant hon ene e grignol Doue. Selaouomp Job e kreiz e boan o kana: « Gouzout a ran ez eo beo-buhezek va Dasprener, ha d'an deiz diweza e savin eus va fouldrenn. A-nevez e vin gwisket gant va c'horf, ha gant va c'hig-me e welin Doue. Me eo a welo anezañ; va daoulagad-me, ha nann re eun all, a welo anezañ. Diazezet eo an esperañs-se e goueled va c'halon! »

Miz du: miz an esperañs eo!

K. R.

Sant Loeiz-Vari a Vontfort

Setu al labour da zevel ar C'halvar e Pontchateau kaset da benn. Ugent metr uheider en deus ar menez, ha Kroaz ar Zalver, etre an daou laer, a zell wardu ar Zav-heol. En he c'hichen emañ ar skeudennou. Eun tammig moger a ra an dro da ziazezet ar grugell, hag eno e kaver misterioù ar Rozera.

Oc'h ober an dro c'hoaz en diañvaez, ez eus plantet eur rozera gwez: kant hanter-kant saprenn, ha bep pemzek, eur ziprezenn.

Gouel ar Groaz, d'ar 14 a viz gwengolo, a zo bet dibabet da venniga ar C'halvar nevez. Pevar beleg a dlle prezeg da dregont mil den dastumet e Gwaremm ar Vadalen. Tad Sant Loeiz-Vari, e galon leun-barr a levenez, a oa deuet ivez.

Siouaz, da zerc'hent ar gouel, wardro peder eur, e tegaser d'an Tad eul lizer a berz eskob an Naoned: difenn a zo ennañ da venniga ar C'halvar!

Na pebez souezenn evit ar bobl! Kement all a labour graet evit netra o vont da get... Hep chom da varc'hata, Loeiz-Vari a gemer hent an Naoned. Ar pemzek leo a zo graet epad an noz, ha setu an Tad e harz treid an ao. 'n Eskob. N'eus seurt da ober: an urz a zo deuet eus uheloc'h! Eur wech muioc'h, enebourien an Tad a oa deuet a benn eus o zaol. Hag hemañ a bleg, hep diskouez an distera displejadur.

Bloaz goude, mestr archerien Pontchateau a urzie pemp kant den evit diskar ar C'halvar. Epad daou zevez, an holl a

nac'has labourat: gourdrouz ha rebechou a glevont... Ha setu ma rankont koulskoude staga d'al labour, rak emaez o vont da heskenna ar Groaz kaer m'eo savet warni Hor Zalver. Gant aon na ve gwallet eun dra ken sakr, e tistagont o unan skeudenn an aotrou Krist, hag e krogont da zismantri ar grugell douar. Pell, pell e pado an abaden, ker pell ma ne vo morse kompezet al lec'h e Gwaremm ar Vadalen.

Abaoe eo bet renevezet labour an Tad Montfort. E hanter ar c'hantved diweza e voe savet a nevez an teir groaz.

En deiz hirio, e kaver e Pontchateau eul lec'h a berc'hirinañ hag en deus 28 devez arat. Eno emañ Hent ar Groaz, penn da benn, savet diouz hini Jeruzalem; ken hir hag hemañ eo, hag ennañ e kaver ivez an hevelep troidelloù gant an hent; eno ive ez eus c'hoaz kals monumantou o tegas soñj eus traou an Douar santelaet gant Hor Zalver... Eno e tired bep bloaz milieroù a dud. Padout a ra labour sant Loeiz-Vari!

A-dreuz ar Vande

An ao. Doue a ouie petra a rae o lezel evelse e eskiben d'en em fazia war gont an tad Montfort: hemañ a gave tro

diwar-ze da sklerijenna muloc'h a vroioù.

Goude prezegennoù Mikael an Nobletz, an tad Maner hag o diskibien war o lerc'h, Breiz-Izel a oa prest da herzel ouz an Dispac'h bras gant feiz ha nerz kalon. An tad Montfort a voe karget gant Doue eus an hevelep labour e Breiz-Uhel, hag ar C'halvar, savet gantañ e Pontchateau, daoust dezañ da veza hanter ziskaret, a gendalc'he da veza baniel war vro.

Met eun dachenn all a jome c'hoaz hag a ranke beza kalonekaet ivez araok ar brezel: ar « Vendée militaire », da lavaret eo eskobioù Lusoñ hag ar Roc'hell (La Rochelle) d'an ampoent. Eno emañ Loeiz-Vari o vont bremañ da labourat; hag eno e chomo betek deiz e varo, nemet an amzer ret d'ober eur veaj e Rouen hag e Paris.

E devezioù diweza miz meurzh 1711, emañ en hent etrezek eno: misioni, a ra en eur vont, dre eskobti Lusoñ; prezeg a ra zoken war c'houlenn an ao. 'n Eskob e iliz-veur Lusoñ.

Ac'hano e tiskenn etrezek kêr ar Roc'hell.

(da genderc'hel).

Y. TRANVOUEZ. S. M. M.

Eus an eil Bleun-Brug d'egile : Landevenneg

« Diou, teir amzer en deus an den: n'int ket heñvel an eil ouz eben », a lavar unan eus hor c'hrenn-lavarioù.

Gwir eo evit an den; gwir ivez evit an traou savet gant ijin e spered ha nerz e zivrec'h.

Da bempvet gouel war 'n -ugent ar Bleun-Brug, bet lidet e Pleyben da viz gwengolo 1935, an devez diweza a oa bet gouestlet da Landevenneg.

Etre mogerioù hanter-gouezet iliz koz an abati, e voe kanet an oferenn-bred gant menec'h Kerbeneat evit Breiz hag ar re holl o deus roet o buhez evit he silvidigez.

Araok an oferenn, e voe kanet, evit ar Vretoned aet da Anaon, ar bedenn gaer « Languentibus in Purgatorio » (« D'ar re a c'houzanv er Purgator »), savet gant eur manac'h eus Landevenneg gwechall.

Goude an Aviel, an aotrou Uguen, person Plougastel, a reas en eur brezegenn gaer, meuleudi Sant Gwenole ha Landevenneg. E gomzou kenta a voe ar re-mañ:

« Salud dit, korn douar-benniget, ker koant azezet e kichen ar mor! Salud deoc'h, Sant Gwenole, a zo chomet amañ c'houez vat ho vertuzioù! Salud

deoc'h, holl venec'h santel, hag ho peus, epad trizek kant vloaz, kanet aman meuleudiou an Aotrou Doue, ha laketa da ziskenn war hor bro Vreiz hennoz an Neñv!

Leun a anaoudegez vat, e teuomp da lavaret deoc'h trugarez, ha da c'houlenn diganeoc'h kenderc'hel da bedi evit Breiz, m'en devezo atao Doue truez outi, ma chomo start en he feiz, ma vezo betek ar fin douar ar Zent.

O sellet ouz ar japel-mañ dismantret, ouz al liorzou a zo aze tro-wardro, e kav din gwelet c'hoaz ar venec'h eus an amzer goz o vont hag o tont dre amañ. A spered e klevan o mouez o kana ar psalmoù sakr, o kana pedenniou an oferenn-bred, ha gant glac'har e lavaran: perak ar mouezioù -ze ne vezont mui klevet hirio? Perak ne welomp mui aman nemet pennadoù moger goloet gant an drez hag an ilio? Perak eo bet dismantret an traou kaer a oa amañ gwechall?... »

Goude beza diskouezet buhez dispar menec'h an amzer goz, ar prezeger helavar a echue dre ar reked-mañ:

« Petra c'hoarvezo en amzer da zont? N'ouzomp ket! Met mar plij gant Doue, e c'houlaoù an deiz ma vo savet amañ

a-nevez eur manati, ma vo amañ adarre eun ti a bedenn, ma savo eus al lec'h-mañ meuleudi Doue hep ehan, ma vo amañ adarre tud o ranna o amzer etre al labour-korf hag al labour-spered, o pedi Doue evit ar re ne bedont ket... »

Piou en defe lavaret e teufe ar reked-ze da wir pemzek vloaz diwezatoc'h, hag e vije brudet hag embannet an nevezenti e kerz eur Bleun-Brug all, hini ar Zent e Kastell-Paol, ar c'haera hag ar brasa 'zo bet biskoaz !

E Kastell-Paol, d'ar 5 a viz eost diweza, urak relegou Tadou hor bro ha dirak Breiz abez, Tad Abad Kerbeneat en deus diskleriet oa prest ar venec'h, evit senti ouz eur galv hag a grede deuet a-berz Doue, da adsevel ha da rei buhez a-nevez da Landevenneg.

Youl e-leiz a Vretoned, beo ha maro, a zo o vont eta da veza sevenet. Tro a zo da gredi, o klevet seurt kelou laouen, o deus tridet eskern an ao. Perrot ha re an ao. Uguen en o beziou. Pet gwech n'am eus ket o c'hlevet o komz eus kement-se !...

Sklaer eo, menec'h Kerbeneat, daoust

d'o nerz kalon, n'int ket goest o-unan da gas eur seurt labour da benn. Ezomm o deus eus skoazell o c'henvroiz.

Ha setu perak en deus hon aotrou 'n Eskob, nevez 'zo, skrivet eul lizer a bastor evit goulenn diganeomp dont war o zikour, ha digeri dezo frank her c'halon hag hor yalc'h.

Piou a c'heñfe ober skouarn vouzar ouz e gomzou, pa ouezer pebez labour dispar a venner ober ?

D'ar mare ma skrivan ar pennadig-mañ, eun nebeut menec'h eus Kerbeneat o deus laketa o zreid war zouar beaniget Sant Gwenole. Emaint-i gant o ero genta... Re all a dremen dre ar parrezioù da c'houlenn sikour digant ar Vretoned.

Gant bennec'h Doue, hir amzer ha kals poan sur awaloc'h, gant harp aluzennou an dud vat ivez, an abati koz a adsavo en e renk, en e splannder hag en e zantelez.

Bez' e vezo en amzer da zont, evel m'eo bet en amzerioù tremenet, oaled ti Breiz, a sklerijenno hag a dommo spered ha kalon ar Vretoned.

L. B.

Galvadenn Tad Abad

Kerbeneat

er Bleun Brug diweza.

Breiziz, va Breudeur ker

A-berz Doue

a-berz hor Sent koz, eman o relegou benniget, e kêr santel hor bro Leon, me ho ped d'en em ginnig a-unan gant hor Zalver Jezuz Krist war an aoter, evit ma c'hellimp adsevel abati Sant Gwenole hag e iliz.

Ra lavaro pep hini e goueled e galon ar pez a lavaran d'eoc'h a vouez uhel :

Gant gras Doue

Landevenneg a savo

Landevenneg a vevo.

Tremenwan hon tud koz

War gomzou St Agustin : « N'int ket marvet : aet araok hepken. »

Ne varvont ket : mont araok a reont, Breiziz.
Gant feiz, bezomp dispart : mervel n'eo ket kriz !
'Vit ar c'hristen fidel, n'eo nemet tremen,
Eus trubuilhou ar bed, d'ar wir vuhez zoken.

'Vel gwiniz er goañv, ar c'horf a zo kuzet ;
Gant doujañs, er vered emañ bremañ kousket.
Ha da c'hortoz an eost, an ene benniget,
Da veuli hon Doue, en neñvou zo pignet.

Emañ en hor c'hichen gant E rouantelez :
« Deuet eo dija, emañ en ho touez... » (1)
Rak Jezuz 'deus roet d'ar gristenien fidel
E Gorf sakr da zebri, Lennomp an Aviel :

« An hini, emezañ, a gred hag e zebro,
Hennez ne varvo ket, da viken e vevo. » (2)
Setu aze 'pelec'h o deus hon tudou koz
Kavet buhez ha nerz war hent ar Baradoz.

Mont araok a reont evit diskouez deomp
Petra 'zo da ober, penaos beva 'dieomp.
Evit beza eurus gant hor sammou pounner,
Evelto kredomp start ! Selaouomp Hor Zalver :

« Eurus, c'houi, a lavar, c'houi hag a die leñva :
Abenn nebeut amzer c'houi a vo leun a joa. » (3)
Tremen 'ra pep tra, pep tra, hep an Neñvou,
El lec'h emañ bremañ ho Tadou, ho Mammou.

Soñjomp 'ta alies en hon tud koz karet :
Dous eo bet o zremen, hag o fin benniget.
Chom a ra ganeomp, gant o garantez vras,
Bennoz d'o bugale : o c'haret reont c'hoaz !

Derc'hel soñj ouz e dad, ha dreist-holl ouz e vamm,
N'eo ket 'vit eur bugel, soñj e Doue, eun tamm ?
Ya ! Bez' int evidomp 'vel skeudennig e zremm.
Rak-se, war hent an Neñv, o heulia a fell demp !

B. CHARLEZ,
eus urz Sant Beneat.

(1) Lukaz 11/20. - 18/21.

(2) Yann 6/20. - 8/51-53.

(3) Maze 5/5.

Goueliou bras an YKAM e Paris

Goude ar goueliou

Eun nebeut miziou a zo eo echuet ar goueliou... Echuet? Nann! Rak, epad an hañv ez eus bet kals goueliou dre eskobti Kemper evit ar re yaouank, da rei eun tañvad eus goueliou Paris d'ar re n'o doa ket bet ar blijadur da vont betek eno. Evelse, daoust d'an amzer tremenet abaoe, n'eo ket maro tan ar garantez enaouet e kalon ar re yaouank gant goueliou miz mae Nann, er c'hontrol eo: ar garantez-se he deus en em ledet evel eun tan-gwall, hag eun niver bras a dud yaouank, paotred ha merc'hed, o deus graet o menoz d'ober labour vat er c'helc'h-studi a zigoro adarre gant ar goafiv. Leun a fiziañs int en YKAM: epad an ugent vloaz diweza, he deus diskouezet petra eo goest da ober... An ero a zo digor frank, hag ar re yaouank hirio o deus youl da ober gwelloc'h c'hoaz eget ar re a zo bet en o raok, dre ma 'z int benviajet gwelloc'h.

A dra zur, n'o deus ket dizoñjet al lizer kaer en deus skrivet deomp an Tad santel ar Pab e unan, evit gouel hon ugentvet bloaz, lizer lennet deomp gant an aotrou Feltin, arc'heskob Paris. Tridal a rae hor c'halonou du-hont o selaou al lizer-ze. Tad an holl gristenien a roe meuleudi deomp evit an amzer dremenet, hag a verke deomp hol labour evit an amzer da zont. « Hirio, emezañ, a bep tu eus miziou ar Frañs, e sav eur yaouankiz kristen unanet ha kalonek, hag a zo evit an Iliz kouls hag evit ar vro, eun esperañs vras. Abalamour da-ze, d'an holl baotred ha merc'hed bodet e Paris e kasomp hor bennoziou hag e lavaromp ar fiziañs vras hon eus enno. »

Goudeze, en eun nebeut gerioù, ar Pab a verk deomp hol labour evit an amzer da zont: « Pedit a ran ac'hanoc'h, paotred ha merc'hed, da gendrec'hel ar peñs a zo bouc'het. Labourit evit renevezi ha kristena ar familh, maen diazez ar vro hag an Iliz. Bremañ, epad ho yaouankiz, eo ret deoc'h aoza ar familh oc'h galvet gant Doue da zevel abenn eun nebeut bloaveziou... Pedit a ran ac'hanoc'h da labourat evit ma vo sevenet dre ar miziou gourc'hemennou Doue hag an Iliz, dreist-holl ar justis en darempredou etre an dud, mistri, mevelien, merourien, hag all... rak penaos e vefe karantez el lec'h ma n'eus ket a justis? »

« Dale'hit soñj, eme c'hoaz an Tad

santel ar Pab, kaer en deus an den labourat, hada, दौरa, Doue e unan, ha Doue hepken eo a laka da greski. Kement-man a zo gwir evit an drevañs, muioc'h c'hoaz evit ar peñs a zell ouz al labour emaoch o staga gantañ, kristena ar miziou. »

Fouge a die beza ennomp eta o vont dre an hent merket deomp gant hon Tad santel ar Pab. War an hent mat emaoch: Hor Zalver e unan eo a lavar deomp kement-se dre c'henou Tad an holl gristenien.

Deomp eta war araok! En em harpa a c'hellomp war an YKAM.

E niverenn miz gouere eus Kroaz Breiz am eus lavaret penaos eo savet an YKAM: henvel ouz eur wezenn dero, diwanet bihan, eo kresket hag en em ledet a nebeudou; deuet eo da veza bras buanoc'h eget an dervenn. Diazezet mat, eo goest bremañ da zibrada yaouankizou ar maeziou, evit tostaat anezo ouz Doue ha rei dezo gwir eurusted. Kemeret he deus en he c'harg holl yaouankizou ar maeziou, paotred, merc'hed, bugale, tud yaouank, kouerien, micherourien. Leda a ra ivez a nebeudou war ar familhou dre an « M.F.R. » (pe kevredigez ar familhou diwar ar maez), renet gant Ykamiz hag Ykamezed dimezet.

Dont a ralo da wir ar peñs a lavare an aotrou chaloni Fave d'ar baotred yaouank bodet e Kleder e miz mae 1944: « A benn dek vloaz amañ, ne vezo mui war ar maez nemet daou rummad tud yaouank: Ykamiz hag an dud diwarlerc'h. »

Pa oan o staga gant al labour-mañ diwarbenn an YKAM, unan eus ar veleien o deus poaniet er penn kenta evit diazeza an Ykam a lavare din: « Evit piou emaoch o vont da skriva? Gouzout a rez kouls ha me, ar re yaouank hirio ne lennont mui ar brezoneg! »

Re wir eo, siouaz! Er penn kenta e veze graet an enklaskou e brezoneg, e veze kanet kanaouennou brezonek, lakat ker brao en hor yez gant ao. Person Bañleg... ha bremañ n'eus mui netra!

N'hon eus ket da deurel bec'h ar rebechou war renerien an Ykam... Ma ne vez mui moullat an enklaskou e brezoneg eo dre ma ne vezont mui

goulennet gant ar strolladoù hag o renerien.

Daoust hag ar re yaouank ne garont mui o Breiz? Daoust hag hor yez, ker pinvidik ha ken nerzus, a jomo war hent an argoll, evel hor gwiskamanchou ker kaer?

Koulskoude e kredan ez eus c'hoaz meur a zen yaouank hag a lenn ar brezoneg... hag a vezo eurus o welet n'eus savet netra etre an Ykam ha yez hon tadou.

Ma skrivan, eo ivez evit ar gerent. Rak, kals kerent a zo c'hoaz ha ne gredont ket er vad eo goest an Ykam da ober d'o zud yaouank. Kals am eus gwelet hag a stourm evit miret ouz o

bugale da heulia ar bodadegoù, evit miret outo dreist-holl da gemer netra e karg. Koulskoude, dre an hent-se eo e tauio o bugale da veza tud goest.

Karet a rafene c'hellfe kals kerent kristen rei ar respont-mañ d'eur beleg deuet da c'houlenn diganto o mab evit kemer eur garg en Ykam: « Ober a rafene eur pec'hed ma virfen ouz va mab da gemer ar garg-se, ma soñj deoc'h eo goest d'ober vad enni... »

Amañ eta e kavoc'h eur wech an amzer, pajenn an Ykam, a rolo deoc'h eur gwel war labour an Ykam en eskobti, ha war an Enklaskou a zikouro hor yaouankizou da ober labour vat.

Y. J.

Hirvoudou mamm sant Herve

O luskellat he mab, Rivanon a hirvoud,
Ha meur a wech zoken n'eo ket evit miret
Da leñva didrouzik, pa zoñj peseurt darvoud
A viro, da viken, ouz Herve da welet

Pegen kaer ar bleuniou,

Bleuni lirin ar maeziou,

Pegen skedus an oabl, gant an heol o para,
Pegen lintrus al loar, pa vez en he c'haera,

Pegen c'houek eo bale

E sioulded ar beure

Hed-a-hed eur sterig, a-dreuz ar prajeler.

N'hell ket, Herveig, redek el lanneier,

Warlerc'h ar c'houlig-aour, na warlerc'h an evnig.

Ne welo ket ar mab dremm livrin e vammig!

Ne welo ket ar balan, luskellat en avel,

Ne welo ket an tarz o sevel en dremmwel

Araok dont ouz ar roc'h, gant safar, da vervel...

Rak siouaz, Herveig

A die chom eun dallig!

Paourkêzig Rivanon! A, sec'hit ho taelou!

Arabat lenva ken e talig eur c'havell!

Ar mabig a luskit, ma chom dall e zellou,

Eun devez a vezo « Sklerijen Breiz-Izel »,

Alc'houeder he maeziou, eun hader santelezh...

N'eo ket an daoulagad brasa teñzor an den.

Petra 'dalv daoulagad pa n'eus ket a furnez,

Pa ne lintr er spered skleried ar feiz kristen!

O mammig glac'haret, a! Sec'hit ho taelou,

Ha lakit ho fiziañs e madelez Doue!

E tal kavell ho mab e welot burzudou...

An dallig a luskit a vezo sant Herve.

SAIG AR GO.

Eus a gement seurt douar

Arabat trei an douarou krenv pa vezont gleb, nag ar re skañv pa vezont sec'h.

Douarou Penn-ar-Bed a c'hell beza rannet e pevar seurt kenta (1): douarou traezek, douarou priek, douarou laosk pe douarou brug, ha douarou taouarc'h.

Er vro-mañ n'eus ket a zouarou traezek a-bez: n'eus nemet en Arvor hag e kavier douarou a seurt-se, enno traez kregin bruzunet, mesket a draez kerreg, degaset gant an avelioù bras, a wiskadou tevoc'h pe tanaoc'h, ha peurvuia war danoaat dre ma pellaer diouz an aod.

Ar riblenn draezek-se a c'hell mont betek eul leo pe eul leo-hanter diouz ar mor. An holl dieien a oar awal'h peger mat eo an douarou-aod dre o doare, ha pegen aes eo d'ar re dost kaout kement ma karont a vezin a bep seurt, kerkouls ha teil-kraou da drempa an douarou.

En Arvor e kaver ivez an eostou pinvidika, pe edou, pe lin pe vruskou. Met eno, an tiegeziou a vez feurmnet awechou re start ha dreist o zalvoudegez.

An douarou priek, pe douarou krenv, a vez kavet peurliesa er stankennou (traoniennou) tost d'ar brec'hioù-mor pe d'ar steroù lec'hiek hag a zeu lark en douarou. Gwall bounner ha gwall stagus e vez alies an douarou-ze, hag er goañv, teu abred dour ar glaoier d'o beuzi, abalamour ma ne c'hell ket an douar a-zindan, alies kourri melen (2), beza treuzet gant an dour.

En hon douarou krenv ez eus tri seurt pe tri danvez kenta: ar pri, an traez meinek (3), hag an druzoni. Pa vez en douar priek trawalc'h a bri ha trawalc'h a draez, ne vez ket ker pounner: aesoc'h e vez da labourat, frouezusoc'h e vez ive.

E stankennou a zo, hag an dra-mañ a zo gwasoc'h, e vez re a bri diouz an danveziou all.

An druzoni (4) a zo eun dra deuet eus al louzeier breinet hag eus an teil a daoler bep blaz en douar. Bez' ez eus druzoni, kals pe nebeut, e kement seurt douar. Bez' ez eo unan eus ar gwella danveziou a gaver en douar. Ar c'henta boued eo da vaga an traou hadet ebarz. Seulvui a druzoni a vez en douar seul welloc'h ha frouezusoc'h e vez ive. En douarou-krenv, e kaver kals druzoni.

An douarou laosk, pe douarou brug, eo ar re zistera. Evel danveziou, e kaver enno an traez meinek pe duffek, deuet eus a-zindan; al lann, ar brug hag al louzeier all, glazvezet ha breinet warno.

Dre ma 'z int re rouez ha re dreut, ne c'hellont rei nemet an eostou distera ha didalvesa: etouez an edou, ar segal hag ar c'herc'h; hag eus ar brouskou gwiriziennek, irvin, ruta ha kaol-saout.

An douarou skañv a blij kals d'an ed du, abalamour ma kemer kals eus e vagadurez en aer (5), ha ne c'houlenn ouz an douar nemet an aezamant da leda e wrizioù.

An douarou skañv a c'holo wardro an diou drederenn eus Penn-ar-Bed (6). Eus ar seurt-se eo peurvuia an douarou menez, hag an darn vrasa eus kreizenna ar vro.

An taouarc'h a gaver er stankennou lagennus, el lec'h ma chom an dour da zac'ha. Evit gwir, an taouarc'h ne deo ket douar, met eur gwiskad teo a

louzeier dourek hanter vreinet, a deu da c'hiazvezi ha da vervel bep bloaz abaoe kantvedou a zo. Ar gwiskad louzeier brein-ze a lonk kals dour, henvel kouls lavaret ouz spoue.

En douarou taouarc'h e kaver lagen-nou ha toullou-kurun (1), el lec'h ma chom awechou, stanket doun, ar jatal a laosker er maez.

An taouarc'hennou a dle beza dizouret dre wazioù toull et hag anchet gant skiant. An tergin pe c'houezadennou savet gant an dour, hag a anver ive toullou kurun, ne zaleont ket da izelaat ha da galedi pa vez bet henchet mat ar gwazioù-dizec'ha.

Bez' e c'heller goudeze ober foenneier mat en taouarc'hennou dizec'het. Evit-se, e trer an douar gant eun alar krenv. Goudeze, e trailher anezañ gant an oged pe gant ar varr, ma wellaio dre nerz an aer hag an heol. Araok ar goañv, e leder war c'horre eur gwiskad teil brein, hag, e taoler warnañ had foenn. Bez' e c'heller ivez e varrat hag e boaza (2) ma kaver gwelloc'h ar c'hiz-mañ. Met mat eo terri ha bruzuna

an douar arak leda al ludu taouarc'h: evelse e teu warnañ peurvuia eur gwiskad yeod druz kerkent hag ar bloavezh kenta.

Ma ne gaver ket a dost dour talvoudus da zour ar foenneg, e teiler bep tri bloaz gant mannoù graet war an henchou-karr en eur zegas warno lann, delioù, pell nizet hag all (3). Anez da ze, an taouarc'h en em zizec'h re, bloavezioù 'zo, evit rei foenn founnus.

An taouarc'h a c'hellfe c'hoaz beza talvoudus, goude ma 'z eo bet tennet, evit kreski an teil, evel ma vo diskouezet diwezataoc'h.

Implijet e vez ivez da ober tan: evit se e vez graet gantañ moudennou e doare ar moudennou kiviñ. Er broioù elec'h m'eo berr ar c'heuneut, ez eus aze tu da esperi an teil a implijer, gant kennebeut all a skiant, da ober moudennou beuzel da lakaat en tan (4).

Y. BEKOD.
Ijinour ar Maeziou.

Daou eostig an impalaer

Bro-Sina, eur vro dek gwech brasoc'h eget Bro-C'hall, a oa gouarnet gwechall gant eun impalaer.

An impalaer a oa o chom en eur maner kaer-dispar, ar c'haera oa er bed, sur awal'h: e vogerioù graet gant mein-marbr a bep seurt liou, ruz, roz, glaz ha gwer: an dorojou, ar prenestroù hag an arrebeuri en diabarz karget a alaoiraj hag a arc'hanteri, a voulou, a zeiz hag a bep seurt mezerioù rouez.

En tu all d'ar maner, en eul liorz hir ha ledan, e welad renkennadour gwez-frouez, ha renkennadour bleunioù a bep liou, stag outo leun a gleierigoù arc'hant, hag a rae eur zoneri dudius dindan an distera mouchig avel.

Er penn all d'al liorz, en eur c'hoad bras, troc'het amañ hag ahont gant poullou dour, e welad an houldi hag ar sined (elerc'h) gwenn-kann o neuñv, hag er gwez uhel, al laboused alaouret o vont hag o tont en eur gana.

Douereier ar poullou a ziskenne en eur ster ledan, ha douereier ar ster a ruilhe etrezek ar mor bras, a welad eun tammig larkoc'h... E gwirionez, baradoz an douar ne dle ket beza kaeroc'h eget douarou ha douereier an impalaer.

Ha koulskoude, eur pesketaer, hag a deue alies da besketa er ster, a lavare d'al c'hmat: « Kaera tra 'zo e rouantelez an impalaer eo kaniri an eostig-noz d'ar par-daez. » Ya! Eun eostig-noz a veze bep noz eno o kana, e koad ar maner, hag a oa eun dudi e glevet. Ar pesketaer her c'have ken dudius ma leze e labour a dreuz, evit chom d'e zelaon: « o Doue benniget, emezañ, pebez dudi e glevet! »

(1) Sterioù douar: Pomperly a ra aman douar traezek eus an douar a zo ennan traez kregin bruzunet; dan-vez talvoudus ar c'hregin-ze eo ar raz. Met kaout a reer ivez en aodou alies traez graet gant kerreg, gant mein-grouan bruzunet; neuze n'eus tamm raz ebet ennan, ha n'eo nemet eun traez grouanek. Arabat fasia war ar poent-se... Setu perak eman ar c'hiz breman da zispartia ar sterioù douar evelhen:

- douar razek, a zo ennan kals raz. Ne vez ket kavet alies e Breiz.
- douar priek (douar pounner, douar krenv).
- douar grouanek (douar skañv), ennan kals mein bruzunet.
- douar humus, ennan kals danvez brein. Douar brug ha douar gwarem a zo douar humus, hag a zo skañv. — An taouarc'h a zo humus ive.
- douar frank, an hini a zo ennan awal'h a bep tra: an hini gwella eo!
- Kourri, pe kourrez: eur seurt pri; anvet e vez awechou « douar bara hag amann ».
- Traez meinek, pe traez grouanek: graet gant mein grouan bruzunet.
- An druzoni: danvez anvet « humus » e latin hag e galleg. An danvez-man a deu diwar ar vreinaidurez. Talvoudus eo war holl zanveziou all an douar. Ne vez fall nemet pa ne vez ket a zanvez magus ganti, rak neuze e vez trenk an douar: an douarou brug hag a zo douarou dister, a zo eus ar seurt-man.
- Eur fazi eo a bez Pomperly: an ed du n'eo ket figus war e zouar, met ne zun ket e vagadurez eus an aer. Ar melchen eo a ra an dra-man.
- Kement-man a oa gwir e 1831!

- An toullou-kurun a zo bet anvet evelse dre eur fals kredenn a wechall, a lavare e oant bet toull et gant ar gurun o koueza.
- Poaza an douar: gwechall e veze devet alies an traou war c'horre an douar, eur wech diwriziennek gant ar varr; an draze a oa « ober eur varradeg ».
- En douarou-man eo gwelloc'h ober foenneier eget gounit ed: gwir eo c'hoaz en deiz hivo. Arabat eo avat trempa gant traou hag a zo louzeier fall enno.
- War ribl ar mor e reer c'hoaz an draze awechou. — Eur c'holl bras eo evit eun tiegez!

Kals beajourien a deue ivez, eus a dost hag eus a bell, da welet ar maner, al liorz, ar c'hoad, al lennou, hag ar ster; hag ar pezh a gavent a gaera oa kaniri an eostig-noz. Pa zistroent d'o bro, o deveze mall da skriva en o c'hazetennou: « Kaera tra 'zo e rouantelezh an impalaer eo kaniri an eostig-noz. »

Eun devez, unan eus ar c'hazetennou-ze a gouezas etre daouarn an impalaer. Chom a reas pell hag hir amzer d'he lenn; ha pa lennas ar c'homzou-mañ: « Kaera tra 'zo e rouantelezh an impalaer eo kaniri an eostig-noz », e c'halvas ar ministr bras. « Petra 'lennan amañ, emezan? Kaera tra 'zo em rouantelezh eo kaniri an eostig-noz? Ha den ebet ne gomz din diwar he fenn? »

— « An eostig-noz? eme ar ministr, nec'het maro. Biskoaz n'am eus klevet ano anezañ. Met marteze, n'eus hini ebet! D'eur skrivagner n'eo ket diaes konta, gevier! »

— « N'eo ket gevier eo, eme an impalaer. Ar paper-mañ zo skrivet gant impalaer ar Japon, hag hennez moarvat n'eo ket eur gaouiad! Eun eostig-noz a zo aze er c'hoad, ha me fell din e welet hag e glevet amañ, er pardaez-mañ, o kana dirazoun. Ma ne deu ket, kement den en do koaniet em zi a vezo bazatet e boull-kalon betek ma restaolo e goan. Kerz buan da glask an eostig-noz! »

Ar ministr bras, en eur skrabat e benn, a yeas d'ar red da c'houlenn digant an dujentil a zaremprede ar maner: « Piou ac'hanoc'h a lavaro din-me e pelec'h e vez an eostig-noz o kana er c'hoad d'ar pardaez?... » Den ne ouie netra! An dujentil en em gawe re vras er maner evit mont da zerr-noz da droienna er c'hoad bras.

Dre c'hras Doue, ar plac'hig vihan Sin-Tao, an hini a veze bemdez o poazat riz er gegin, a glevas ar marvailhou.

— « An eostig-noz, emezi? A! Hennez avat a zo mignon din-me! Da c'houde koan, her gouzout a rit, am eus aotre da vont d'ar gêr, en tu all d'ar c'hoad, da gas ar restajou d'am mamm a zo klanv war he gwele. Mat, pa vezan o tont en dro, bep pardaez, e choman pell hag hir amzer da zelaou e ganiri. O! Pebez mestr kaner! Leñva a rankan ouz e glevet, ken dudius eo e vouez, ha ken lirin e ganaouenn. Tui, tui, tui, tui, tui! Gloudougloudouglou! Kirrrrr!... emezañ. Flouroc'h e vouez eget dorn va mamm! Hag e teu war va lerc'h dre ma 'z an, hag e soubl e benn d'am saludi, pa zavan va dorn etrezek ennañ. »

— « A! plac'hig vihan, te avat a vezo enoret amañ, ma c'hellez lakaat hennez emberr da zont da gana er maner. Te vezo rouanez er gegin epad da vuhez, hag az pezo aotre da zellet ouz an impalaer pa vezo ouz taol! »

— « O, dont a raio, emezi. Met c'houi a ray kement a c'houlennin? »

— « Ya, hep mar ebet! eme ar ministr. »

Goude koan, ha goude beza bet o welet he mamm, Sin-Tao a lakeas planta eur weznig sapr dirak dor vras ar maner. « Ha bremañ, en hent! emezi. »

Hag ez eas d'ar c'hoad gant eur bern dujentil hag itronezed.

En eur vont, ar re-mañ a glevas eur vlejaden. « Mouez an eostig eo? » eme eun tron zot.

— « O, evelate! eme Zin-Tao. Nann, mouez eur veoc'h, ha netra ken! »

Eun tammig pelloc'h e klevjont eur vouez dous o kana: « Kou-oug, kou-oug! »

— « Mouez an eostig eo? » eme eun ofiser.

— « Nann! Mouez eun touseg, ha netra ken! » Met gortozit, tostaat a reomp. Sellit, emañ-heñ ahont! »

Hag e tiskouez dezo, gant he biz, war skour eur weznig-aleg, eul labousig bihan evel eul logodenn, ha loued evel eur raz.

— « Hennez? eme ar ministr bras. N'eo ket kaer e zilhada da vihana! »

— « N'eo ket gant e zilhada eo e kan, eme Zin-Tao. Chomit a-dreñv, ha chomit peoc'h, mar plij! »

Sin-Tao a zavas he dorn da zaludi he mignon. Ha kerkent: « Tui, tui, tui, tui, tui! Gloudou, gloudou glou! Kirrrr... » Ar c'hoad a dregernas, an hekleo a zistonas gant mouez an eostig dirollet. « Tui, tui, tui... », ne skuize tamm o kana. Ar ministr bras, an dujentil hag an itronezed a jome souezet... Hag e vouez'hoarzent hag e

ouelent gant ar blijadur, hag e sellent an eil ouz egile, hag e sellent ouz an eostig bihan, e veg digor frank hag ar pluñv c'houezet war e c'houzoug, hag o soubla e benn dirak Sin-Tao goude e vommou kan.

— « Distroit d'ar maner, ha peoc'h atao, mar plij », eme Zin-Tao... Hag an holl a zentas outi.

Sin-Tao a deuas neuze etrezek ar maner, en eur zevel he dorn bep an amzer, hag an eostig-noz a deuas d'he heul en eur nijal eus an eil gwezenn d'eben, betek ma voe erruet er weznig-zapr plantet dirak dor vras ar maner.

An impalaer a oa eno, azezet dirak an nor war eun tron uhel, en dro dezañ an dujentil hag an itronezed. Ha dao! P'he devoe savet ar plac'hig he dorn, an eostig-noz, diwar e weznig-zapr, a stagas adarre gant e ganiri: « Tui, tui, tui, tui, tui! Gloudou gloudou glou! Tirrrrr!... »

Hekleo ar maner a zistonas evel ma tistone ar c'hoad. Hag an impalaer d'e dro, beuzet en eur mor a levenez, a voe gwelet oc'h heja e benn kurunennet, o c'hoarzin laouen, hag o ouela, tud keiz, evel ar pesketaer, evel Sin-Tao, evel an dujentil. Ya, ouela a rae! Sin-Tao a welas an daelou a levenez o ruilh eus e zaoulagad.

Daoust hag an eostig-noz o gwelas ivez? N'ouzoun ket! Ar pezh a ouzoun eo e chomas eno da gana epad hir amzer, hag e nijas goudeze d'ar c'hoad da dremen an noz. Distrei a reas bemdez, bep pardaez, epad eur miz, da heul Sin-Tao, da zidui an impalaer en e balez. Adalek an deiz-se, Sin-Tao, a c'hellit kredi, a voe deuet mat gant an holl dujentil ha gant o mestr.

Siouaz! An diaoul a c'houezas gwarizi e kalon ar mestr-muzik a rene war muzikerien ar maner.

Ha petra reas hemañ? Ne zivinfec'h ket! Karga eur micherour Ijonus dreist eus ar Japon d'ober eul labous houarn, heñvel-poch ouz an eostig, nemet oa kaeroc'h e bluñv, pluñv kamm alaouret war e lost, hag a zistage kaniri heñvel-poch ouz kaniri an eostig-noz. N'oa ken d'ober nemet sevel dezañ e bouezioù bep ar mare.

An eostig houarn a voe degaset dre bost d'an impalaer, hag a zegouezas er maner dres p'edo an eostig beo o tont da heul Sin-Tao. Pebez abadenn er maner, pa voe tennet eus e voest, ha lakaet er maez e kichen ar weznig-zapr.

— « Lakomp anezo o daou da gana asamblez, eme ar mestr-muzik. Alo, Sin-Tao, sav da zorn! »

Sin-Tao a zavas he dorn hag an eostig beo a stagas gant e ganiri. Ar mestr-muzik a zispegas an eostig houarn, hag hemañ a zirollas diouz e du. Allaz! Ne ganent ket asamblez, ha fuilhet oa ar gudenn. An eostig beo a jefiche bep tro e ganaouenn, kals pe nebeut, e lec'h egile ne c'helle rei nemet atao ar memes tra, ar pezh a oa merket en o rojou.

— « Lakomp anezo da gana bep eil, eme ar mestr-muzik. Alo, Sin-Tao, sav da zorn! »

— « Da blou, da betra? emezi. Emañ nijet kuit va mignon. »

Gwir oa! O kredi moarvat e raed goap outañ, eostig ar c'hoad a oa distroet etouez an haleg, hep beza gwelet, ker bihan oa.

— O, mat, eur pezh kaer! eme ar mestr-muzik. Ma fell dezañ mouzat, evit hemañ ne vouzo ket! Hag e lakas herr en eostig houarn. Hemañ ivez a oa eun dud! e glevet. Ouspenn tregont gwech e voe savet e bouezioù, ha bep tro e tiduas an impalaer hag an dujentil. Souezet oant o welet penaos e oar an dud difrez (1) al laboused. Chomet e vijent epad an noz d'e zelaou o kana evel egile. « Tui, tui, tui, tui, tui! Gloudou gloudou glou! Tirrrrr!... »

D'ar zul warlerc'h e voe galvet an amezeien da zont d'e glevet. Nag a blijadur o doa! Kement a blijadur ha m'o deveze pa vezent mezo gant an te koefet hag an optom! Ha koulskoude, Sin-Tao hag ar pesketaer a gare muioc'h an eostig beo.

Epad daou vloaz e padas ar blijadur. Met evel ma lavar ar c'hantik, « tremen ra pep tra »! An impalaer a lakeas an eostig houarn war eun tron e kichen e wele, epad an noz; ha pa ne c'helle ket kousket, e lakae tro er mekanik. « Tui, tui, tui, tui, tui!... »

(1) Difrez = ober heñvel ouz...

Eun nozvez, endra ma 'z ae en dro, setu ma voe klevet eur strakadenn, diou strakadenn : krak ! krak ! Hag aet mut al labous houarn... An impalaer, glac'haret holl, a zavas a lamm eus e wele, da glask tud da zresa ar mekanik.

Eun apotiker a daolas eol war ar rodou : ne ganas ket muioc'h !

Eun orolajer a gempennas an aheioù hag ar rodou, hag al labous a ganas adarre eun nebeudig. Met mouzat a rae alies, ha difennet e voe sevel e bouezioù nemet eur wech bemdez.

An dristidigez a gouezas war ar maner kaer.

Dizale an dristidigez-se a yeas war gresk. Rak an impaler a gouezas klañv, ha klañv da vervel. Ar prenestrou a voe serret. Evit mouda trouz ar bouteler, e voe taolet pallennou teo war leurenn ar c'hampreier. Kant louzaouer brudet a voe galvet da gaout ar paourkêz klañvour. En aner ! Fallaat a rae bemdez ! Ha den ne deuas mui war e dro, adalek an deiz ma voe kavet eun impalaer all da gemer e blas.

Hag edo eno o krena gant an derzienn ha gant an enkreiz... hag o tramzi alies zoken. Ya, tramzi a rae ! Kredi a rae dezaf gwelet an Ankou askornek a tont dirak e wele, e faic'h savet uhel, hag o lavaret gant e vouez pounner : « Impalaer, impalaer, emacut din ! Dizale e renti kont eus da vuhez ! Eur vad bennak az peus graet, met nag a zrougou ! Nag a fallagriez ! Nag a fallagriez ! »

Hag e krene an impalaer ! Hag e lavare gant an nebeudig nerz en doa c'hoaz e vouez : « Muzikerez din ! Kanaouenn an eostig din ! » Met ne deus den da zevel e bouezioù d'al labous houarn.

Ha setu dislivet holl, treut evel eur skoul, ez ae d'ar red etrezek ar maro.

O burzud estlammus ! Eun devez, d'ar pardaez, etre ma 'c'h hirvoude truezus en e wele, e klevas dre ar prenestre hanter-zigor eur ganiri dudius o sevel. « Tui, tui, tui, tui, tui ! Gloudou, gloudou glou ! Tirrrr !... »

Petra oa a nevez ? Sin-Tao, ar plac'hig vihan, he doa kemeret truez ouz he mestr. Hep ranna ger da zen, oa aet d'ar c'hoad da glask an eostig beo, he mignon. Hag hemañ a oa deuet d'he heni betek ar maner. Daoust ha soñj en doa euz dalc'hoù an impalaer ? Marteze awalch. Rak netra ne blij kement d'eur mestr-kaner evel gwelet an dud o tridal, o c'hoarzin pe o ouela gant e ganiri.

Hag e kanas adarre, hag e tirollas da gana, ken brao ha ken lirin ma voe troc'het terzienn an impalaer.

Kousket c'honek a reas, dek eur diouz renk, goude kaniri an eostig.

Hag antronoz vintin, pa deuas ar ministr bras da welet ha n'oa ket maro, e kavas an impalaer ker laouen hag an heol, azezet war e wele d'e zaludi, en eur lavaret : « Deiz mat deoc'h, aotrou ministr. Degasit riz din-me buan. Me gred ez eun pare ! »

PAOTR TREOURE (Diwar Andersen).



Daou eostig o senti



teñzor an dintin goz

(kendalc'h)

Fañchig Kideller, deuet pinvidik dre gaout teñzor e dintin goz, a zo bremañ o klask dimezi gant Soazig Maner-ar-c'hoad, eus eun tiegez prenet gantañ. Gwechall oa bet nac'het Soazig outañ gant he mamm Janig. Fañchig en deus kavet an tu, er villin, da zevel e karr Janig.

Aet ar c'harr pelik diouz ar villin, Janig a c'houennas ouz Fañchig :

— Neketa, Fañchig, e renevezi al lizerferm gancomp ? Ne c'hellan ket lakaat em fenn az pije ar galon da ziloja eun tiad tud ha n'en deus morse noazet dit, na graet an distera gaou ouzit. Ha rei a ri da c'her din... d'am dinec'ha... hag e vezi eur paotrig mat, sell ?

— An dra-ze a vo diouz an diviz a lakan a vremañ, amañ, etrezomp-ni hon daou, Janig : « Roit din, ha n'ho pezo ket diganen », eme Fañchig, krak e zaoulagad.

— O Daonik ! An dra-ze a vije kemeret hep rei !

— Hep lakaat ar garantez da dreil !

— Dont a ra mat ganez, va faotr ! Pebez teod !... Eun teod alacuret, goest da denna an naer diouz ar c'hael !

— Mar gellfen dont a benn da denna ho mestr diganeoc'h-c'houi, e vefe gwelloc'h din !

— Marteze awalch, va faotr ! Bremañ emacut ganti : bremañ e ouzoun gant petra emacut, e chal. Gortoz eun tammig... Bremañ e welin hag e kavin leuzou da vouga da vorched.

— Kaer am eus gortoz, ne welan netra ebet o tont... nemet Gouel-Mikael o tostaat d'ar red. Ne ran ket eur van o klevet ac'hanoc'h o troada gevier din, Janig !

— Na me kennebeut all, o klevet ac'hanout, Fañchig, o c'hoardrouz va dloja a-benn derc'hent Gouel-Mikael !

— Ma ! Evel a garot... Ho ker diweza eo, Janig ?

— Deus ganen betek du mañ, kement ha p'emacut er c'harr, hag e welin ha gevier eo a zo ganen-me !

— Aet awalch e vijen bet ganeoc'h, Janig, paneve e rankan kas kelou da ostizez ar « Gazeg c'hlas » ne goanin ket eno emberr.

— Ha piou a viro ouzit da gas ar c'helou-ze e kelt ma vin-me o prena va diankajou ?

— Ma ! Evit ober plijadur deoc'h. Janig, e sentin ouzoc'h. Koulskoude...

— Koulskoude petra ? a droc'has ar wreg. Akre ! torter a zo ac'hanout ! a gendalc'has ar wreg en eur heja-diheja brech'h Fañchig.

Tizet ganto tiez kenta ar vourc'h, pep hini a yeas diouz e du : ar vammgaer da-zont evit prena ar pezh a rae diouer dezi da zegemeret gweila ma c'hellfe he danvez mab-kaer ; heman da lemel e varo ha da brena gwestell, madigou ha daou bakad butun : unan da lakaat er fri, egile da zevel er c'horn.

Fañchig a oa prest eur pennadig a oa, pa glevas ar gazeg koz o c'hoarzhichal en eur bloata leurenn an hent. Lakaat a reas e iir en toull-prenestr hag e welas, hep beza gwelet, Janig o tostaat, eur baner zu ouz he brech'h zehou hag eur meli pakadenn en he dorn kleiz.

Ar wreg a daolas he fourvezioù e traoñ ar c'harr, a daolas eur zell en dro dezi, en eur skarmotal : « Me gave din eun bet peil oc'h ober va zro ! Ha, padal, e rankan chom amañ da zislevi-gen, da c'herioz ar gourlerc'hier-se... Ha ma ne deu ket ? Neuze avat emacut fresk ! Trist e yezo din lenn al lizer ! »

War ze, Fañchig a ziskennas daou-ha-daou derezioù e di, en eur vourkane, ha prestik goude edont adarre, Janig hag heñ, azezet o daou keñver-ha keñver er c'harr-skaonek... Ha dao, hag el leo adarre, sounn he lost gant Fañni !

Eun tammig abarz degouezout gant an hent a gas d'ar maner, a hed renken-nadou gwez pin, setu ma voe klevet eur vouez o youc'hail :

— Aze emacut ganti avat, Fañchig !

— Pe dost, a eilgerias ar paotr yaouank !

— Forz a ra dit-te, genou tarteze, a gendalc'has Janig.

— N'eo ket fall dit...

Teir pe beder gristilhadenn, taolet gant ar gazeg o santout he c'hraou, a droc'has ar gomz d'ar farsereze...

(Da genderc'hel)

AB-SULIO.

KELOU

*Eur genstrivadeg
varzoniez brezonek*

Pedet omp da embann, a-berz Skol-Veur an Drouiz, Barzed hag Oveded, ar c'helou-man :

Eur gador-varz a zo bet kinniget gant eur Gembreadez vat, an itron Andrew Breeze, da C'hoursez Barzed Breiz-Vihan, evit beza roet da c'hounider eur genstrivadeg barzoniez.

Embann a ra eta Goursez Breiz-Vihan e vo digoret eur genstrivadeg varzoniez etre an holl vrezonegerien adalek an deiz kenta a viz du. An oberou lakaet da genstriva a dleo degouezout gant an Drouiz Meur Eiler P. Loisel araok ar c'henta a viz mae 1951, da ziwezata.

An oberennou lakaet da genstriva, nevez pe goz, ne dieint ket beza traou bet embannet biskoaz araok deiz-digeri ar genstrivadeg.

Pep kenstriver a ranko kas daou bez-labour :

a) unan war an danvez a blijo dezan, hag en devo 150 gwerzenn d'an nebeuta, 600 d'an hira.

b) unan all war an danvez-mañ : « Emgav kenta Merzin ha Gwivian e Baranton », hag en devozo 12 gwerzenn d'an nebeuta, 24 d'an hira.

An oberenn hira a vo savet hervez ar reolennoù a blijo d'an oberour. Evelato, arabat dezan ankounac'haat kement-mañ : e pep barzoniez ez eus awen, danvez ha stumm. Hep awen, n'eus ket a varz ; hep danvez ha stumm, n'eus ket a varzoneg.

Ar varzoneg verr a vo savet, ez-ret, hervez doare gwerzaoua ar brezoneg-krenn (kenganez-lusk), pe hervez unan eus an doareoù all a genganez kembraek.

Ne vo dalc'het kont ebet eus ar rann-yez nag eus an doare-skriva, gant ma vo reiz ar yezadur. Mar bije divizet lakaat moula an oberenn gurunennet war goust ar C'hoursez avat, e vije graet gant an doare skriva KLTG, nemet difennet groñs e vefe gant an oberour.

An oberennou lakaet da genstriva, a vo barnet gant eul lez, enni tri pe c'houec'h den, dibabet gant an Drouiz-Meur, hag a labouro pe en em vodo hervez e gemenn ha dindan e zorn pe dorn e zileuriad.

Douget e vo ar varnedigez abred awalc'h da veza embannet dirak an holl, diwar ar Maen-Log, da zeiz ar C'horsez digor ar bloaz 1951.

Roet e vo ar gador dioustu d'ar Barz kurunennet, a vo kadoriet hervez lidou Gorsedd Ynis Prydain. En e berc'henniez e vo da viken diwar neuze.

Kement dael a zavfe diwar lakaat ar reolennoù-mañ da dalvezout a vo barnet, hep galv ebet, gant an Drouiz-Meur, pe gant e zileuriad, war e c'her ha dre e zorn, hervez ar boaz hag an eeundet.

Embannet e k'er an Naoned,
d'an 8 a wengolo 1950.

EOSTIG SARZAO.



E gouellou Kerne, e Kemper
gouere 1950

LEORIOU...

Da zont er maez da viz kerzu :

Jean Choleau : LES BRETONS A L'AVENTURE

(1 volume, 250 pages, illustré)

Broché : 650 fr.

100 exemplaires de luxe, signés et numérotés : 800 fr.

Envoi contre remboursement : Unvaniez Arvor, Vitre (C. C. P. 5852 Rennes).

Sommaire : Bretons de la Brenne-Malerbe et le tour du monde. — F. Martin et F. Pyrard-Marion du Fresne. — Yves de Kerguelen. — Les pêcheurs de St-Paul. — Amsterdam. — Les compagnons de Puisaye au Canada. — Le marquis de Rays et la Nouvelle France. — Cultivateurs et pêcheurs bretons en Algérie. — Aux sources de l'Amazonie avec Viellerobe.

KANNV.

Evit ar geginerez

Jelkennadoù pesk.

D'ar 16 a viz here diweza eo bet beziet, e Gwitalmeze, korf an aotrou *Ronan Cardaliaguet*, marvet d'an oad a 76 vloaz.

An ao. Cardaliaguet a oa eur beleg hag en deus sanket doun e roudou war zouar eskobti Kemper.

O veza bet ganet e Kemper, n'en devoe ket an eurvad da zeski ar brezoneg ez vihanig. Met deuet da veza beleg, e teskas e yez mat-kenan, e Gwitalmeze, gant an aotrou Grall, e berson, hag an aotrou Illorellou, kure asamblez gantan epad meur a vloaz ha barz brudet dindan an ano a « Bleiz Nevet ».

En eur vervel e 1917, an aotrou Grall a lezas e karg an ao. Cardaliaguet « Kannad ar Galon Zakr ». Abaoe edo rener ar gelaouenn-ze, a'jom atao ar muia lennet gant hor c'henvroiz.

Diwezatac'hik, e voe lakaet ivez e penn ar « C'hourrier du Finistère », warlerc'h maro Kaourintin an Nours. An ao. Carda, evel m'edo ar c'hiz d'e henvel, a skrivas eno bep sizun, epad 20 vloaz, eur pennad pe bennad e brezoneg.

Speredel bras, e labouras kals gant e bluenn e doug e vuhez hir. Ne skrivas ket a levrioù e brezoneg. Met e holl levrioù o deus holl eur saour breizek, ha bez' o deus lakaet anaout ha-karet hor Breiz hag he bugale.

*Gant amzer ha dre bilpaza
e reer an hent ar pella.*

Pastez eog (saumon).

Frika mesk-ha-mesk eur voestad eog, hep an dour, daou melen-vi poaz-kalet, ha daou aval-douar poazet en dour. Renka war eur plad e stumm eur wastell e kelc'h. Golei gant maionnez.

Braoat ar pladad gant melen eur vi poaz-kalet bruzunet e poultrenn, ha lakaat tro-war-dro ar gwennou-vi troc'het a dammou hir.

ITRON KERLANN.

Kontilli mat.

Gouzout a rit pegen fall e troc'he ar c'hontilli diverglus bet graet da genta. Gwasoc'h c'hoaz, ne c'helled ket o lenna.

Deuet eer a-benn, nevez 'zo, da ober kontilli diverglus hag a droc'h kals gwelloc'h eget araok. N'int ket c'hoaz koulskoude ken lemm hag ar c'hontilli ordinal graet gant dir.

Grit eta ho tibab hervez m'ho peus c'hoant da gaout kontilli ha ne verglint ket, pe kontilli hag a droc'ho kement a welint, zoken pennou ho pizied.

C'HOARIOU

GERIOU-KROAZ AL LAGAD-DU

Niv. 22

DIVINADENNOU. — 1) Eur wezenig m'eus a-drenv va-zl, gwelloc'h he c'hroc'hen egeti. Petra eo ?

2) Petra a c'heller ober hep arc'hant ?

3) Ha gouzout a rit konta ?

« Per, eme Yann, ro din unan eus da zenned, hag am bezo kement ha te ». — « Ya, eme Ber ! Met ro din unan eus da re, hag am bezo daou zannad ouz unan dit-te » !

Pet danyad o deus Per ha Yann ?

	1	2	3	4	5	6	7	8
1	E	N	O	R	U	S		G
2	O	A	D	O	U		N	A
3	C	O	R			B	E	C
4	E	N		B		R	I	N
5	D	E	N	E	L	E	Z	
6		D	E	R	O		O	K
7	R	A	Z	E	D		U	R
8	O	D		D	A	N		I

Respost da zivinadennoù Eost-gwengolo :

1. An toull. — 2. Ar berniad kartou da c'hoari. — 3. Eur c'houlouenn-goar.

GERIOU-KROAZ AL LAGAD-DU, goanv. — 6. Ya ! — Amzer da zont « Rei ». — 7. Lost ar miz diweza. — Netra e Kerne.
 nio. 23. — A-blaen : 1. Unan eus frouez ar garantez. — 2. Pennou-adrenv ar bigi e Kerne. — 3. Greunenn ed. — Amzer da zont » OBER ». — Benveg muntret. — 5. « Vont » kemmesket. — Diou vogalenn. — 6. C'hou ha me. — Frouezennig c'houez. — 7. Dour he deus a bep tu. — 8. Er ger « Kaz ». — Geot dibennet.

A-zet : 1. Ar vaouez a ro drajez da zeiz ar vadeziant. — 2. Benveg mekanik. — 3. War an ti, kemmet. — 4. « Nes », kemmesket. — Amzer antdremenet « Tizout ». — 5. Klask lin. — Gwenn war an douar er

	1	2	3	4	5	6	7
1							
2							
3							
4							
5							
6							
7							
8							

AL LIAMM

kelaouenn lennegel

Un niverenn 80 pagenn bep daou viz

Koumanant evit 5 niverenn : 600 lur

Sekretour : P. LE BIHAN, 1, Avenue Marceau
 TRAPPES (Seine-et-Oise) — C. C. P. 5349-06 Paris

ART SACRÉ
 ORFÈVRE
 BRONZES
 STATUAIRE
 CHASUBLERIE

Pierre PÊCHE

14, Boulevard de Kerguelen

QUIMPER (Finistère)

TELEPHONE 8-10

E TI SOUFREREZ KERNE

E. BEGOT

13, straed Jean-Jaurès, QUIMPER
 Téléph. 9.33

E vez dreset adleuzet evit ar gwella goloioù-kaoutchoug ar rodou
 Gwerz a c'holoioù a bep ment — Labour vat, graet hep dale

MOUSSEUX SUPÉRIEUR "V^{VE} AUBIN"

Gwin-Spoumek Dreist
 E gwerz e ti an holl Varc'hadourien-Gwin
 dre ar Vro a-bez

Poupées Broderies
 Le Minor
 Pont-Sabbé
 Bretagne

STAL LEVRIOU LE DAULT



16, Straed Ronan Madeg
 KEMPER

Levriou brezonek, Gallek, ha skeudennou
 RE GOZ, RE NEVEZ diwar-benn BREIZ

Prenet e vez ho levriou (ha goloioù koz) diganeoc'h
 Betek en ho ti ma c'houlennit

E TI
TREANTON

e kaver peb tra

Harnachou, Kinkailherez, Glaou
Koat " an Nord "
Houarn

Ha kement tra ho peus ezomm
en ti
war-dro an ti
hag en fiegez

■
TI TREANTON
E LANDIVISIAU

war Blasenn an iliz ha plasenn Lourdes

TELEFON 7

■
E KASTELL-PAOL

war ar Blasenn Vras

TELEFON 130